

AOTROU SANT PER

Diskan : Aotrou Sant Per, hor zant Patron,
Kreskit hor feiz, hon nerz-kalon,
Ma vezimp holl gwir vugale
D'an Iliz savet gant Doue.

- I. Pesketour lenn Jenezareth,
Gant hor Zalver pa'z eo galvet
Da zavetei an eneu,
Raktal a lez e rouejou.
2. E feiz 'zo krenv, ha d'hor Zalver
Oc'h embann mister an Aoter,
E lavar : "C'houi, ha c'houi hepken,
A ro d'an dud gwir sklerijenn."
3. Kalz n'anavezont ket Jezuz
Daoust d'e oberou burzudus ;
Simon a lavar koulskoude :
"C'houi eo ar C'hrist, gwir Vab Doue."
4. Ha Jezuz d'ezan a respont :
"Te a zo Per, ar gwir maen-font,
A vo diazezet warnan
An Iliz santel er bed-man.
5. "Te 'vezo prins an Ebestel
Ha kenta Pab an dud fidel ;
Eus rouantelez an Nenvou
Me 'roio d'it an alc'houeziou."
6. E garantez a zo dispar :
Na tud, na madou an douar,



Netra outan n'en deus miret
Da vont da-heul Salver ar bed.

7. M'en deus nec'het eur Mestr ken mat,
Evitan pebez kalonad !
Gant daelou puilh 'hed e vuhez,
E verk glac'har ha karantez.
8. Ha pa vo diskennet warnan
D'ar Pantekost ar Spered Glan,
Raktal ez ay d'an eneu,
D'o zavetei a wiliadou.
9. Ar baianed, ar Juzevien
A zeuy da veza kristenien :
Na poan, na trubuilh, na prizon,
Netra ne drec'h e nerz-kalon.
10. It, o sant Per, breman da jom
Pell diouz ho pro, da gêr vras Rom,
D'ar gêr a vo kêr-benn ar bed
Gant gwad hor Zalver dasprenet.
- II. Goude labouriou ugent vloaz,
D'ho tro c'houi 'varvo war eur groaz ;
Met diwar gwad ar verzerien
E savo danvez kristenien.
12. Savit d'an nenv, Pastor karet !
Eno, gant Doue kurunet,
A ! kendalc'hit da rei skoazell
Gant ho pedenn d'an dud fidel.

+&+&+&+&+&+&+&+&+&+&+&+&+&+&+

A. Cong. n° 129
in Kantiñon Brezonek
Eskopti Kemper ha Leon, 1953

BAGIG SANT PER

1. Eun deiz, Jezuz a welas war mor Jenezared
Simon hag e vreur Andre, a ioa o klask pesked:
"Ganin-me deut, emezan, laoskit ar pesket mut :
C'houi 'vo c'hoaz pesketourien, met pesketou-
rien tud."

Diskan

Per eo sturier an Iliz, hervez komz hor Zalver;
Hag ar Pab a zo breman en deus galloud sant
Per.

2. O micher dreist pep micher! teuler e rouejou
Ha digas bagadou tud beteg porz an Nenvou
Nann, biskoaz al lestr kaera, karget a beziou
N'en deus talvezet bagig, bag Per ar pesketour

3. A-greiz ar c'houmoul tenva, pet gwech an
drouk spered
En deus klasket goueledi bag ha martoloded !
Met sant Per, aonik gwechall, en deus desket
bale
Kerzet 'ra war gein ar mor, e zorn e dorn Doue.

4. Bag an Iliz gant ar mor n'hell ket beza lonket
Ouz Satan hag e gounnar harpa 'raio bepred.
Diredit, avelou foll, flastrit al listri bras
Bagig sant Per en eonenn a ya, a yelo c'hoaz.

5. Alies, en tarziou gwenn, pedenn Hon Tad Santel
A zo henvel ouz hini martolod Breiz-Izel :
"Va Doue, wa zikourit evit tremen ar Raz,
Rak va bag a zo bihan hag ar mor a zo bras!"

2. Eun devez, ar Zant oa galvet
Da gwitaat e rouejou,
Gant hor Zalver oa bet choazet
Da besketa eneo.
3. Per, etouez an holl Ebestel,
Oa lakeet er renk kenta,
Ha bagik an Iliz santel
E oa karget da sturia.
4. Epad pasion hor Zalver,
Per nac'has e vestr karet,
Mankout a reas d'e zever
Gant aon da veza goapaet.
5. Mez goude e bec'hed mezuz,
Ne ra ket evel Judas,
Gouzout wa madelez Jezus
Zo ledan 'vel ar mor bras.
6. Evit skigna ar feiz kristen,
Kals a boan a gemeras
Ha zoken evit he difen,
Ez eo marc war ar groaz.
7. Bag sant Per zo en hon amzer
Hejet gant avolou foll,
Mez gant eun hevelep sturier
Ne c'hell hiken mont da goll.
8. O sant Per, o Patron karet,
'Vidomp holl petit bemdez,
Ma vo miret wa kennerzet
Ar feiz kristen er barrez.

+o+o+o+o+o+o+o+o+o+o+